

Ar skol

Sur e oa kemm bras etre buhez ar skolidi gwechall ha bremañ. Da gentañ, gwechall e oa nebeut a vekanikoù en-dro deomp. Ne oa ket a veloioù da vont d'ar skol, nag otokarr ebet o tastum ar vugale eus an eil kontre d'egile.

Setu e rankent mont war-droad, eus o ziegezh betek ar bourk, rak ar skol a veze er bourk peurliesañ. Lod o doa tri gilometr hanter da ober evel-se, ha kement-all evit distreiñ eveljust.

Setu, ar vugale ne c'hellent ket mont d'ar skol yaouankik, ne vijent ket bet gouest da ober an hent. Neuze, ez aent evit ar wech kentañ etre c'hwec'h ha seizh vloaz, hervez ma veze tost o ziegezh pe belloc'h.

Me 'm oa seizh vloaz pa oan aet d'ar skol evit ar wech kentañ.

War ar maez dre vras, ar vugale ne choment ket pell er skol abalamour da zaou abeg : an diouer a arc'hant alies, hag an ezhomm da greskiñ ar sikour en tiegezh. Ar baotred dreist-holl a heulie ar wazed er parkeier abred ha lorc'h bras a veze enno o vont. Klevet e veze lavaret :

« Ret eo sterniañ ar c'hezeg yaouank abred ». Da lavaret eo e ranke ar vugale bezañ savet strizh e doare ar c'hezeg. Va zad, e penn kentañ an ugentvet kantved n'eo bet nemet tri bloaz er skol.

Ar paotrezed a chome en ti, e skol o mamm. Azalek neuze e tougent o c'hoef kentañ, ur c'hoefig skañv ha plean evit ar sizhun hag unan dantelezet evit ar Sul.

Evel-se e teuent da vezañ tud vras.